

# Salmou Azvent - Bloavez C

Sul kenta an Azvent C - Salm 24  
J'ai toute confiance en Toi, mon Dieu.

Ton : Warzu ennoc'h - MKB p.245

Musical notation for Salm 24, featuring a treble clef and a 4/4 time signature. The melody is written on a single staff with lyrics underneath. The lyrics are: "Va oll fi - ziañs 'zo en-noc'h, va Dou - e."

4 Diwarbenn da heñchou Aotrou, ro din deskamant,  
Kentel diwarbenn da wenojennou.

5 Heñch ahanon en da wirionez,  
Kenteill ahanon, Te, va Doue Salver.

8 Mad ha just eo an Aotrou,  
Ragse e kelenn d'ar beherien an hent.

9 Heñcha 'ra an dud izel hervez ar justis,  
Deski a ra d'an dud izel o hent.

10 Oll wenojennou an Aotrou a zo karantez ha feiz  
Evid an hini a vir e emgleo ha reoliou.

14 Sekred an Aotrou a zo 'vid ar re a zouj anezañ ;  
Dezo e ro da anaoud e emgleo.

Eil sul an Azvent C - Salm 125

Ton : Pe trouz war an douar MKB p. 189

Le Seigneur a fait des merveilles, nous sommes dans la joie !

Musical notation for Salm 125, featuring a treble clef and a 6/8 time signature. The melody is written on a single staff with lyrics underneath. The lyrics are: "Traou kaer 'neus grêt Dou - e, el le - ve-nez e - maom!"

1 Pa zigasas endro Doue prizonidi Sion,  
E oam evel o huñvreal !  
Leun a c'hoarzou or genou,  
Hag on teod o youhal.

3 Hag e lavared e-touez ar baganed :  
Braz e-neus greet Doue gand ar re-mañ !  
Ya, Braz e-neus greet Doue evidom,  
Nag e oam laouen !

4 Digasit en-dro, Doue, on tud prizoniet  
Evel froudou an dezerz.

5 Hadet e oa bet en daelou,  
En eur gana e oad oc'h eosti.

3 Mond a ra an den en eur ouela  
En eur zougen hag o teuler an had.

7 Hag e teuer en-dro er youhadou,  
En eur zougen erdin ed.

Trede sul an Azvent C – Kantik Izaïas 12  
Crions de joie, Dieu est avec nous

Ton : *Pe trouz war an douar MKB p. 189*

5 Tri - dom a le - ve - nez: gan - (n)eom e - ma Dou - e! \_\_\_\_\_

Setu Doue, va zilvidigez,  
Fiziañs am-eus, ne grenan mui,  
Rag va nerz ha va c'han eo an Aotrou,  
Eñ'zo bet va zilvidigez .

Bennigit an Aotrou, youhit e Ano,  
Embannit e oberou e-touez ar poblou.  
Digasit da zoñj ez eo dispar e Ano.  
Kanit d'an Aotrou

Rag traou burzuduz e-neuz greet ;  
Ra vint anavezet war an douar a-bez.  
Youhit ha tridit gant al levezeg , c'hwi hag a zo o chom e Sion,  
Rag braz eo en ho kreiz Sant Izrael.

-----

Pevare sul an Azvent C - Salm 79  
Seigneur, écoute-nous.

Ton : *O Elez ar Baradoz MKB p.174*

3 Ao - trou Dou - e, \_\_\_\_\_ or se - la - ouit.

2 Pastor Izrael, selaouit,  
C'hwi azezet war ar Gerubined,

3 Dihunit ho c'halloud  
Ha deuit d'or sikour !

15 Aotrou Doue oll-c'halloudeg, deuit en-dro !  
Euz Iein an neñvou, sellit ha gwelit :  
Deuit da weladenni ar winienn-mañ ;

16 Evesait ouz an hini bet plantet gand ho torn dehou

18 Ra vezo ho torn war den ho torn dehou,  
War mab an den ho -peus kennerzet.

19 Biken mui ne bellaim diouzoc'h  
Grit deom beva hag e pedim hoc'h Ano.